




Photo Charrouin, St-Pol-de-Léon

AN AMZER A DRISTIDIGEZ

Son a ton nevez
savet gant ar barz kastellad Francis MOAL
« Alc'houeder Leon »



I

Eun amzer glac'haruz mignonet
War hor bro gaer, a zo erruet,
Ne za ket kaer ar c'hommerziou
Fall du e za an holl labouriou.

II

Ar c'hommerziou, eur pennad a zo
Siouaz ! Ne zeont ket kalz en dro.
Poan braz ho deuz war ar meaziou
Kaout arc'hant vit ho legumachou.

III

An holl a gompren, n'oun ket nec'het
P'ho dez ket arc'hant ar baysantet,
Pa ne za ket ar paysant en dro,
Deostu'man a rivin barz ar vro.

IV

Yann zaos eo, gant e benn kalet,
Gant e jalousi, a zo mouzet.
En heur c'hoarzin e lavar deomp-nhi :
Dalc'hit ho patatez, ho prikoli.

V

Lavaret a ra, leiz e c'hinou :
D'ho traou, n'hi a serr hom dorjou,
N'hi a zo barrek d'ennem veva,
Dalc'hit ho legumach da vreina.

VI

Siouaz ! Gant e daol fallagriez
Laka er vro an dristidigez,
Fall a labouriou, fall za peb tra,
Ma kendalic'h vezo poan e veva.

VII

An arc'hant touesk an dud zo manket
Araok veze gwelet ar merc'het
Aveac'h e kear, beac'h d'ar staliou
Ne zellent ket ouz an dispignou.

VIII

Eb dale traou a veze prenet,
Ar panerou prout veze karget
Kass a reent gantho tra peb tra,
Ne gavent jamez re ger nentra.

IX

Da c'houde, gant kamaradezet,
Kafe kuignou, a veze drebet.
Bremen aveach erruet e kear
E karfent dija beza er gear.

X

Gwelet c'heller potred ar staliou
Pegen tenval e vez ho fennou,
Aliez vez ar sizun tremenet
A foull nentra n'ho devez gwerzet.

XI

Lavaret c'heller e gwirionez :
Deuet an amzer a dristidigez.
Kwezet eo war al labourerien,
Siouaz ! An amzer a binijen.

XII

Goulenomp digant'n' Aoutrou Doue
Ma ielo mad an traou adarre.
Lavaromp dezhan taoler eur zell
War hor bro gaer a Vreiz-Izel.

XIII

Vidomp neuze, pebez levenez.
En holl vezo laouenedigez,
Rak pa gwezo arc'hant barz ar vro,
Al labour, peb tra ielo en dro.

Francis MOAL.

(Reproduction interdite.)